

Fichenn enskrivañ da
DEVEZH-STUDI
D'ar Sadorn 24 a viz C'hwevrer 2018

Da gas da : KEAV
22 hent Mouliouen 29000 KEMPER
keav@keav.bzh

ANV

ANV BIHAN

CHOMLEC'H

.....

Pgz

E-meil

Priz an devezh : 28 € (mizoù pedagogel ha pred)

D'ho kelaouiñ : Skol-hañv K.E.A.V. 2018

Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion

Div sizhunvezh-studi a vo kinniget ar bloaz-mañ c'hoazh :

Ar prantad 1añ : eus ar **Sul 8/07** da noz
d' ar **Sadorn 14/07** a viz Gouere da greisteiz.

An eil prantad : eus ar **Sul 15/07** da noz
d' ar **Sadorn 21/07** a viz Gouere da greisteiz.

**Bez e c'hellit dibab chom ur sizhunvezh hepken,
pe chom an div.**



KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERION

***A ginnig deoc'h un devezh-studi
diwar-benn :***

DEVRI

ur sell war ar geriadur enlinenn

KRENNLAVAROÙ HA YEZHADUR

D'ar Sadorn 24 a viz C'hwevrer 2018

Er greizenn Amzer-Nevez

56270 PLAÑVOUR

ROLL AN DEVEZH

Adalek 9 eur 1/2

Degemer ha banne kafe

Da 10 eur nemet 1/4

gant Yvon GOURMELON

DEVRI : Ur sell war ar geriadur enlinenn

Ar geriadur DEVRI, ur geriadur istorel savet gant Martial Menard hag a c'haller sellet outañ dre internet, a zo ul labour divent savet gant un den hag a oa ledan e ouiziegezh war ar brezhoneg hag a labourer kalz. Alese ur binvidigezh souezhus hag a ro un daolenn eus implij ar gerioù er skridoù dre ar c'hantvedoù hag a ro buhez d'un tamm mat a c'herioù peuzankouaet.

Evel gant ar braz eus al labourioù a seurt-se ez eus gwanderoù ivez. Klasket e vo displegañ ar re en emgaver gante er geriadur istorel-se

Didouezañ an daou du, ar pezh zo mat hag ar pezh n'eo ket kenkoulz, n'eo ket distruj, n'eo nemet klask gwelet sklaer. Ar geriadur DEVRI a chomo ur bennoberenn hag a sikouro ar vrezhonegerien, dreist-holl pa ouezint diwall ouzh gwanderoù ur seurt labour.

Yvon Gourmelon -.E Plougastell-Daoulas eo ganet, Brezhoneger a-vihanik eo. Kelenner matematik eo bet e Brest hag e Gwengamp. O chom e Bulad (a zo e kichen Kallag) emañ.

Liesseurt eo e oberennoù. Skrivañ danevelloù ha romantoù en deus graet gant an anv-pluenn **Yann Gerven**, (an dastumad danevelloù diwezhañ : Traoù nevez ; ar romant diwezhañ : Diskrap e Skrabyar). Romantoù evit ar grennarded en deus savet ivez. Studiadennoù skiantel ledañ en deus skrivet kenkoulz all. Hag ul labour yezhoniezh a-bouez en deus graet ivez. Kemeret en doa perzh evit sevel an hentenn yezhadur evit ar skolarjoù Diwan. Evezhiadennoù yezh a vez gantañ en Al Liamm alies. Skrivet en deus ouzhpenn-se meur a studiadennoù yezh, an oberennoù diwezhañ eo al levr « yezh adur ! » gant Keit-Vimp-Bev

Da 12 eur 1/2

Merenn

Da 2 eur gk

gant Mark KERRAIN

KRENNLAVAROÙ HA YEZHADUR

Pep skor zo talvoudus da zeskiñ ur yezh : anvioù-lec'h, anvioù-tud, kanaouennoù, krennlavaroù.

Ma ne c'hall ket an holl kanañ (dre leziregezh alies) e c'hall an holl deskiñ ha kelenn krennlavaroù : gerioù ha yezhadur a gaver enne. Kinnig a c'haller ur 100 krennlavar da zeskiñ reolennoù diazez hag ivez studiañ an islavarennoù, ha dreist holl an islavarennoù keñveriata, peuzdianav d'ar re yaouank ha deskerien nevez.

Ouzhpenn-se e vo klasket gwelet pere eo ar fazioù stankañ e brezhoneg hag a ranker difaziañ seul wech m'o c'hlever.

Mark Kerrain - Ganet e Runan, e kanton Pontrev, e Treger, brezhonegerien e dud hag amezeien. Kas a reas e studioù war ar brezhoneg hag ar saozneg e Skol-Veur Roazhon. Kelenn a reas er skolioù-noz, e KEAV, hag e liseoù da gentañ, e Skol-Veur Roazhon goude.

Sevel a reas an hentenn evit deskiñ brezhoneg « Ni a gomz brezhoneg », embannet gant TES. Krouiñ a reas Sav-Heol, (kentelioù-noz ha ti-embann). Ouzhpenn embann levrioù kelenn e skrivas hag e troas meur a levr, danevelloù, barzhonegoù, istorioù evit ar vugale. Gantañ e voe troet an daou « Harry Potter » kentañ. Plijout a ra dezhañ dispakañ krennlavaroù ha kanañ brezhoneg : daou zastumad en deus embannet, hag ur bladenn a garfe ober ma kavfe sonerien troet gant ar brezhoneg en-dro dezhañ.

'Tro 5 eur – 5 eur ½ Bilañs an devezh-studi